



HAL
open science

Janig Bodiou-Stephens, an avanturourez trankil

Mélanie Jouitteau

► **To cite this version:**

Mélanie Jouitteau. Janig Bodiou-Stephens, an avanturourez trankil. Pobl Vreizh, 2020, 4 p. hal-03830544

HAL Id: hal-03830544

<https://hal.science/hal-03830544>

Submitted on 26 Oct 2022

HAL is a multi-disciplinary open access archive for the deposit and dissemination of scientific research documents, whether they are published or not. The documents may come from teaching and research institutions in France or abroad, or from public or private research centers.

L'archive ouverte pluridisciplinaire **HAL**, est destinée au dépôt et à la diffusion de documents scientifiques de niveau recherche, publiés ou non, émanant des établissements d'enseignement et de recherche français ou étrangers, des laboratoires publics ou privés.



Distributed under a Creative Commons Attribution 4.0 International License

Jouitteau, Mélanie. 2020. 'Janig Bodiou-Stephens, an avanturourez trankil, atersadenn Janig Bodiou-Stephens', *Pobl Vreizh*.

Janig Bodiou-Stephens, an avanturourez trankil

Atersadenn gant Mélanie Jouitteau.

Er bloaz 2003 mboa klasket lenn an desenn gentañ diwar-benn yezhadur ar brezhoneg a rae gant binvioù ar yezhadur jenerativel (mod Chomsky). Skrivet oa bet e saozneg e 1982 gant ur yezhourez a Londrez, hag hi a-vihanig deus brezhoneg Bro Dreger, Janig Stephens. An desenn-se n'em boa ket kavet e Breizh, met ur mignon alaman din, Dirk Bury, a rae e studioù e University College of London (UCL) d'ar mare-se hag en doa luc'hskeudennet al levr din. War baper e veze graet, anat deoc'h, evit un nebeut Pounds ha kalzig amzer. Joa! Div sizhunvezh war-lerc'h em boa resivet dre an ti post 274 bajenn, bep eil bajenn moulet er penn a-dreñv ! Lakaet em boa an toullad paperioù priziüs-se war un daolig espress-kaer, ha me d'ober tro an daol bep div bajenn e-pad mizioù... Dizoloet em boa labour don ur skiantourez a ouie ober al liamm etre fedoù he yezh ha teoriennoù nevezañ skiantoù a lavar, gouest d'ober un dielfennañ sutil deus he yezh c'henidik. Ur vaouez a Vreizh, ivez, teiryezheg anezhi, he doa graet he micher er skiantoù e fin an ugentved kantved. Bremañ 'zo pdf he zesenn ganin (ra vo meulet al levraouegoù niverel!), ha alies en em gavan o tistreiñ eno, ha da bennadoù skiantel liesseurt skrivet gant Janig Stephens abaoe (he fennad war ar frasennoù dizispleg 'zo un teuzar!). Savet ez eus bet an atersadenn-mañ dre skrid, skuizh ma oamp da vare fin ar c'henfinañ gant kudennoù teknikel Zoom, Whatssapp, Facetime hag all.

- Pelec'h emhout o tigemer ac'hanomp, Janig ? Ez pro emhout ?

Er ger c'hon e Bulien tost da ger Lannuon. Ne ver ket kenfinet ken met bepred n'an ket alies maez deus ar ger. Ganet e oan amañ e Bulien lec'h on deuet endro da chom. Ma zad oa ganet amañ ivez.

Derchet am eus sonj deus meur a dra. Aet oan d'ar skol pa oan pevar bloaz, ha ne ouien ket galleg, met Sœur Bernard a gomze brezhoneg diouzhin da gentañ. N'am meus ket soñj da deskiñ galleg. Ma mamm a devoa kaset ac'hanon deus an deiz kentañ, skol ar seurezed evel-just peogwir e oa skol ar merc'hed. Sœur Bernard oa anv ar skolerez gwisket en griz, ur pezh kotillon ganti gant godelloù don. Tennañ rae ur graouenn gelwezh deus foñs he c'hodell pa vije lennet mat. Buan awalc'h e oan tremenet deus a c'hlaez kentañ d'an eil. Kaset e oan e pension da Skol Jeanne d'Arc da unnek vloaz, ha chomet betek ar BEPC. Er bloaz 1968 am boa soñjet mont d'ober un tamm tro e Bro Kembre. Bet e oan e Bro Iwerzhon hag Bro Skos, ha c'hoant am boa d'ober anoudegezh gant Bro Gembre. War ar vag 'La Duchesse de Bretagne' e oan en gavet gant ur rummad tud yaouank deus Bro Gembre en o zouesk dañvez ma fried. Dimezet e oamp e 1970 hag aet da chom e kichen Londrez. Ne oa ket aaset din kavout labour evel skolerez hag ar stumm gwellañ a oa mont d'ar Skol Veur d'ober ul lisañs.

An eil bloaz am oa tremenet ar Cambridge Proficiency ha setu tapet ganin kaout ur yalc'h d'ober ul lisañs Education e Southampton. Galleg a oa unan deus ar sujedoù am boa choazet ha tamm-ha-tamm e oa savet em spered an ide da vont pelloc'h war yezhoniezh ar brezhoneg ha dreist holl urzh ar gerioù a zo ken disheñvel deus ar galleg. Bet ur plas ganin er School of Oriental and African Studies, lec'h e oa da

c'houlz-se un departament yezhoniezh mat tre. Gant Ruth Kempson am eus graet ma zezenn.

- Pelec'h peus labourer war-lerc'h ? Gall rafes laret deomp deus ar yezhourien all poa kenskrivet ganto ?

Anveet am boa Bob Borsley e Londrez. Eñ 'oa oc'h ober un desenn war syntaks ar c'hembraeg. En un departamant yezhoniezh all mat tre e oa, e UCL, ha bezañ vije kentelioù evit hon div Skol Veur asambles. Buhezek da vat e oa ar yezhoniezh da c'houlz-se, reuz etre tud a c'heulie Chomsky hag a re all ! Dick Hudson a oa kapapl da vat na grede ket e jeneratived. Geuil a rae frammadur Halliday, hag e 'model' eñ oa Word Grammar. A-benn ar fin eo bet implijet Word Grammar evit yezh an Internet hag ar pellgomzoù. Diwezatoc'h am boa anveet Maggie Tallerman dre he labour war ar c'hembraeg ha Maria Luisa Rivero dre Bob Borsley.ⁱⁱ

Labourer am oa un tamm e skolioù Stevenage ken oamp aet da Vro Gembre, ur wech en nevoa bet ma fried labour e ospital Cardiff. Dre chañs am boa graet anaoudegezh gant un den a gelenne yezhoniezh da studierenn en orthophonie. Hag eñ, bet ul labour nevez gantañ, a glaske unan bennak da gemer e glassoù e Cardiff. Ha setu me groget aze ha chomet pemzek bloaz. Plijout a rae din kelenn ar yezhoniezh evel just, ha sikour an etudianted da gompren pouezh ar yezhadur evit o labour, kompren penaos e gresk yezh ar vugale, an divyezhegezh hag ivez petra c'hoari ma c'ha ar yezh da goll dre kleñved pe aksidant.

- Labourer poa diwar-benn yezh ar vugale gant Fransez Favereau ha Nikolaz Davalan er bloavezhioù 90. Gell a rafes lavar deomp un nebeut deus ar raktres-se?

Gant sikour un iwerzhoneg am boa bet ur yalc'h gant an Europ da sevel un englask war yezhoù keltiek ar vugale yaouank. Evelse e oa ar skoseg, an iwerzhoneg, ar c'hembraeg hag ar brezhoneg. Savet am boa ar goulenn, ha roet dimp war dro 30 000 euro, am eus aon, evit tri bloaz englask. Kloset e oa gant un emvod e Plijidi. Deuet a zo un toullad artikloù. Met evit ar Brezhoneg e oa bet kollet un hanter deus ar bizskriavañ dre ur gudenn urzhiataer. Bet eo lakaet an danvez iwerzhonek war CHILDES (un dastumadur yezhoù war Internet hag a sikour disrannañ an danvezⁱⁱⁱ), Met evel ma oa prometet gant Nikolaz ne vefe ket disklozet netra eo chomet an dañvez ganin c'hoazh.

- Santout a ran-me 'vez disheñvelerioù etre Bro-Saoz ha Breizh, a-fed plas ar merc'hed. Daoust hag e santez ar memestra?

Ya gwir 'zo disheñvelrioù etre merc'hed e Breizh ha Bro Gembre. E gwirionez emañ an dispar etre er broioù anglo-sakson ha protestant hag a re latin ha katolig. E Bro Gembre eo bet religious da vat an dud ha strikt gant ar stumm bevañ : neblec'h da vont d'ar sul nemet d'ar chapel, na dansoù ha dreist na pub na restaurant ebet digor betek at bloavezhioù 60-70.

En tu-hont a zo meur a chapelioù evit relijionoù evel ; baptism, methodist ha non-conformist. Desket eo bet da dud o farrezh kemer perzh en o chapel ha derc'hel penn pa vije ezhomm. En tu-hont e kaver ivez a dreuz Breizh Veur ar Women Institute, un emglev dre ar merc'hed, dreist-holl ar re o chom war ar maez. Sikour a raent an eil hag eben. Savet e oa bet er C'hanada hag erruet e Bro Gembre e 1915.

E 1967 e oa en em dispartiet re Bro Gembre deus re Bro Saoz pa devoa diviset gant a re-mañ e vefe saoz yezh ofisiel an Institute. Kembraeg eo hon yezh ha miret e vo ha kemeret un anv nevez : Merc'hed y Wawr, Merc'hed ar Goulou Deiz. Diwezhatoc'h eo bet krouet Honno, un ti embann savet gant merc'hed evit skrivagnerezed o chom e Bro Gembre hag a skriv pe e kembraeg pe e saoz^{iv}. Er broioù dindan an Iliz gatolik eo bet miret ar merc'hed en o flas, desket dezho nompas en em lakaat en arao. Renet an traoù gant paotred memes ma c'heo bremañ un tammig kreñvoc'h mouezh ar merc'hed.

- Penaos peus bevet-te istor ar Breksit? Daoust hag en deus kement-se un dalvoudegezh a-bouez ez puhez?

Ur rann kalon eo eviton. Tremenet am eus al lodenn vrasañ deus ma buhez er Breizh Veur. Memes ma n'en em santan ket British tamm ebet ma c'hon bepred tost deus spered ar vro. Ma merc'h henañ hag he familh a zo o chom du-hont ha diaes eo gouzout peseurt dazont a vo etre Breizh Veur hag an Europ.

- Daoust hag e peus keuz deus un dra bennak ez buhez micherel, un dra pefes bet joa oc'h ober ha n'ac'h eus ket bet tro d'ober?

E gwirionez nann, pas bremañ. Dre meur a henchoù c'hon bet tremenet met e gwirionez eo ar yezhoniezh neus roet din ar muiañ blijadur. Kompren ar yezh vrezhonek, an diforc'h etre brezhoneg ha galleg. Pezh a vank din bremañ eo klevout muiañ muioc'h a vrezhoneg ha reiñ lorc'h da vrezhonegerien. Ma chom kuzh ar yezh neuze e varvo. Ur bern labour a zo d'ober war ar yezh komzet hirie. D'am soñj e seller war an amzer dremenet, ne chom yezh ebet evel eo bet. Pep rummad yaoukizoù a zigas cheñchamant memes ma vez chalet a re gozh. Ezhomm a zo da greskiñ niverenn a vrezhonegerien ha reiñ lans dezhoù da gaozeal.

- Petra a lak lorc'h ennout?

Brezhonegerien eo ma bugale ha tri deus ma bugale vihan a gomz brezhoneg gant o mamm ha ganin. Ur chañs vras am eus bet o treuziñ ar mor ha gallet ganin mont d'ar Skol Veur ha bezañ bet barek d'ober ma studi war ar Brezhoneg.

- Trugarez Janig. Ur chañs brasoc'h c'hoazh eo bet deomp evit studioù ar brezhoneg.

(+ notennoù er fin)

- i . Tesenn 1982 : *Word order in Breton*, School of Oriental and African Studies, University of London.
- Pennad 1990. : 'Non-finite Clauses in Breton', *Celtic Linguistics: Readings in the Brythonic Languages*, Ball, Fife, Poppe, Rowland, *Celtic Linguistics: Readings in the Brythonic Languages* Festschrift for T. Arwyn Watkins, *Current Issues in Linguistic Theory* 68, Benjamins, 151-166.
- ii . Evit ur sell holleg war yezhoniezh jenerativel ar brezhoneg en ungentvet kantved, sellout war lec'hienn ar wikiyezhadur ARBRES; Jouitteau, Mélanie. 2019. 'Grammaire générative', <https://arbres.iker.cnrs.fr>, [20/05/2020]. Levlennadurezh holleg Janig Stephens 'zo da vout kavet e 'Bibliographie'.
- iii . <https://chilides.talkbank.org/>
- iv . Bodiou-Stephens, Janig. 2018. 'Honno', *Al Liamm* 429, 16-22.